

- 77 -

Dastumad Pennwern : dornskrid 90

112. MESUREZ AR MELINER

(follenn 77)

Bonjour deoc'h, va dous Loïza,
(Vit) o kalon penoz a ra ?

- Ma halonnik a zo seder
ag o hini, va chervicher ?

- eman ar brud dre ar c'hanton
o c'heus chenchet o hopinion.

O c'heus chenchet a gwir amour
evid komeret eur strinker dour.

- na me ne meus ket promettet
Da velliner iaouank e bed.

Nemed da henond fanch an hamon
a zo e chom en melin Saïdon.

Me meus eur vezen en pen va zi
a loj al louarn dindani

a vijou daou, a vijou tri.
Neb en deus iar lakeet en ti
espicial ar polezi
espicial ar merhet koant
rag al louarn a zo friand

- ed e va iarig er vezen
non ked penos mond de disken

- Tollid eun dornad kerc'h dezi
A galvet-i piti, piti.

~~~~~  
vvvvvvv

Mari Bozeg 18 févr. 1851

~~~~~  
vvvvvvvvvvvvvvv